

# Ar paotr glac'haret

*Pas trop vite = 116 environ*

Pa oan em c'havell bi-ha-nik trei  
ta la la la la la la la la Pa oan em c'havell  
bi-ha-nik Me 'moa choazet eur vestrezig.

1

Pa oan em c'havell bihanik  
Trei ta la la la la la la,  
Pa oan em c'havell bihanik  
Me 'm oa choazet eur vestrezig.

2

Me 'm oa choazet eur vestrez koant  
Heb ober d'ei he c'homplimant.

3

Hounnez a zave beure mat  
Evit lakaat he c'houef ervat.

4

Petra dalv d'in-me beza koant  
Pa ne c'hellan ket kaout va c'hoant.

